

YF_0014_Fanchig bihan

(Barzaz)

Fanchig bihan, mevel an ti,
Kerhit e'it din da Gerouedi.

Tapit din ma jao ha bridit 'on
Hag eh in me d'ar c'hoed geton.

Demad deoc'h c'hwi plac'h ag al lenn,
C'hwi ganna gwenn, c'hwi walc'ha gwenn.

C'hwi ganna brav, c'hwi walc'ha gwenn,
C'hwi walc'hey e vouchouer d'un den.

Gannan ket brav, walc'han ket gwenn,
Walc'hin ket e vouchouer da zen.

Kar me 'm eus ur breur en arme
Ha pa ouiehe kement-se...

Ha pa ouiehe kement-se,
'droc'hey ma goug 'ziwar ma divskoe !